

Da Zoue, perc'henn an Trevajou

Ton : « Salud d'ac'h, Iliz ma Farrowz ».

1

C'houlz a ra d'an ed darevi,
'Vel da bep tra ouzoc'h senti,
Ni hoc'h ador, 'n eur ginnigan
An ed-man d'ac'h, Tad ar gwellañ.

2

Ar gwiniz, bevans ar c'horfou,
Laka gwad ru 'n hon gwaziou;
Hep hon labour, hep hon c'houezen,
Ar mary dre holl renje souden.

3

Hep ho sikour, an ed hadet
Diwan, darevi raje ket;
D'ac'h eta, bennoz, trugare,
Eus hon ferz-ni, ho pugale.

4

Hep prez hag ive hep diskuiz,
'Vit danzen douar d'ar gwiniz,
Gant hon c'hezeg hag hon eler,
Ec'h aromp don hon farkeier.

5

Ha C'houlz, koulz all, hep famm diskuiz,
Lak, pab-eil, an heol hag ar gler,
Da zont d'ar c'houlz ha d'an amzer
D'ober 'r pez n'hallomp ket ober.

6

D'ober Sakramant an Oter,
Bleud flour ar gwiniz a laker,
Korf ha gwad pur an Oan divin,
C'h adoromp holl war an daoulin.

7

Hep, marteze, sonjal awalc'h
E ve bet troc'het gant hon falc'h
Ha bet hadet, 'pad an here,
An ed breman korf an Doue.

8

Teurveef digemer breman,
O Doue mat, an teskou-man
Ginnig d'o Zad e vugale,
O c'halon leun a zrugare.

9

Ha mar keret, gant hon gwiniz,
War an Oter, 'barz an iliz,
C'h adnevet ar burzud bras
Grêt gant Jezus, rök mont en kroaz.

10

Bemde, neuze, dre hon gwiniz,
Hon devo lod 'e' zakrifis
Ginnig, bep beure, hon fastoc,
Vit renti d'ac'h gloar, hag enor.

11

War an Oter, han c'halono
Vit ho karek, en em gavo,
Hag a-hed ar devez, goude,
E vevfont en gwir garante.

Pedenn ar Pennou Kalet

DISKAN

C'houlz, Tadou koz an Arvor, galloudus en Nervo,
Sellañ holl hent trugare ouz ho, Tud hag ho Pro,
Miret touez ar Vretoned ar garante divrall
D'ar Fe, d'ar Yez, d'an Douar, 'vel en amzer gwechall.

D'ar yaouankiz touellet gant sorc'henn an arc'hant,
Sorc'henn ar plijadurioù ha kant tra diskiant,
Digoret o daoulagad ha diskoezet, hep mar,
Ne gavfont evurusted nemet en o douar.

Ton : « Breudeur, ni 'ghev o klemmou ».

2

Tadou enorus ar Vro, deut, gant turnez ha bogli
Da demzi ar sperejou e nep korn Breiz-Izel,
Ma savo d'imp adarre, 'vel dervenn war ar roch
Bretoned pennou kalet ha dispont eveldoc'h.

DIR-NA-DOR